

WAR DAL AR BÉD

Guillou (Nn 123)




1. War dal _ ar béd, an heol _ a bar Hag a strev eur splann - der _ dis- par:
 2. Mestr ar _ vu - ez, ma - ro _ er Groaz, Trec'h d'ar ma - ro, a zo _ beo c'hoaz:
 3. Mer - hed _ a oa eet min - tin- tre, Da val - za - mi korv Mab _ Dou - e:
 4. Daou A - bos - tol, p'o deus _ kle- vet, Bu - an d'ar béz o deus _ re- det;



1. Da vin - tin Pask, leun a _ vu- ez Eo sa - vet Je - zuz eus ar béz.
 2. D'an tre - de deiz ez eo _ sa- vet, Her - vez m'en doa bet la - va - ret.
 3. Ne oa er béz korv e - béd kén... Be - o - bue- zeg e oa Mab - dén.
 4. Sant Yann, skañ - voc'h e zi - ves- ker, En em ga- vas a - raog sant Pèr.

oOo



5. Eun El _ e gwenn 'la - ras _ de - zo: "Ho Mestr ka - ret n'eo mui _ ma - ro."
 6. Sant To - maz ne oa ket _ en ti, Ha ne ble - ge ket da _ gre - di...
 7. "Gwe - lit _ toul - let gand an _ hou - arn Va zreid, va c'hos - tez, va _ da - ouarn;
 8. To - maz _ a goue - zas d'an _ daou - lin, O la - va - roud: "Va Mestr _ di - vin!"



5. D'e zis - ki- bien 'n em zis - koue - zas: "Ar peoc'h gan - (n)eoc'h!" a la - va - ras.
 6. Eun deiz ma oa gan - to _ To - maz, Je - zuz a - dar - re a zeu - as.
 7. La - kit ho piz em femp _ gou - li, Na jo - mit kén da zis - kre - di."
 8. -Eü - ruz ar re o deus _ kre - det, A - raog zo - ken be - za gwe - let!

- | | | |
|---|--|---|
| <p>1. War dal ar béd, an heol a bar Hag a strev eur splannder dispar : Da vintin Pask, leun a vuez Eo savet Jezuz eus ar béz.</p> <p>2. Mestr ar vuez, maro er Groaz, Trec'h d'ar maro, a zo beo c'hoaz : D'an trede deiz ez eo savet, Hervez m'en doa bet lavaret.</p> <p>3. Merhed a oa eet mintin-tre, Da valzami korv Mab Doue : Ne oa er béz korv ebéd kén... Beo-buezeg e oa Mab-dén.</p> | <p>4. Daou Abostol, p'o deus klevet, Buan d'ar béz o deus redet ; Sant Yann, skañvoc'h e zivesker, En em gavas a-raog sant Pèr.</p> <p>5. Eun El e gwenn 'laras dezo : "Ho Mestr karet n'eo mui maro. " D'e ziskibien 'n em ziskouezas : "Ar peoc'h ganeoc'h !" a lavaraz.</p> | <p>6. Sant Tomaz ne oa ket en ti, Ha ne blege ket da gredi... Eun deiz ma oa ganto Tomaz, Jezuz adarre a zeuas.</p> <p>7. "Gwelit toullet gand an houarn Va zreid, va c'hostez, va daouarn ; Lakit ho piz em femp gouli, Na jomit kén da ziskredi."</p> <p>8. Tomaz a gouezas d'an daoulin, O lavaroud : "Va Mestr divin !" - Eüruz ar re o deus kredet, A-raog zoken beza gwelet !</p> |
|---|--|---|

SUR LE MONDE

1. Sur le monde, le soleil rayonne Et étincelle d'une splendeur sans pareil : Au matin de Pâques, plein de vie Jésus s'est levé du tombeau.
2. Le Maître de la vie, mort sur la Croix. Vainqueur de la mort, est encore vivant : Le troisième jour Il est ressuscité, Comme Il l'avait dit.
3. Des femmes étaient allées tôt le matin, Embaumer le corps du Fils de Dieu : Dans le tombeau, il n'y avait plus de corps... Plus vivant que jamais était le Fils de l'homme.
4. Deux apôtres, quand ils ont entendu, Ont vite couru au tombeau ; Saint Jean, aux jambes plus légères, Arriva avant Saint Pierre.
5. Un Ange blanc leur dit : "Votre Maître bien-aimé n'est plus mort". A ses disciples Il se montra : "La paix soit avec vous !" dit-Il.
6. Saint Thomas n'était pas à la maison, Et n'arrivait pas à croire... Un jour où Thomas était avec eux, Jésus vint encore.
7. "Voyez percé par le fer, Mes pieds, mon côté, mes mains, Mettez votre doigt dans mes cinq plaies, Ne restez plus incrédule."
8. Thomas tomba à genoux, En disant : "mon divin Maître !" "Heureux ceux qui ont cru, Avant même d'avoir vu".